



Gwerz Sant Jakez Lezerazian

War don (Rumengol)

Diskan

*Kanomp, kanomp a greiz kalon
Gloar da Zant Jakez, hor Patron
Ha pedomp holl, ma kendalc'bo
Da skuilh e vennoz war hor bro.*

I

O Patron mat, pa voec'h galvet
Diwar lenn-vor Jenezareth,
Raktal c'houi heuliañ Hor Zalver,
Gand ho preur Yann, Avieler.

V

Repoz er bed-man n'hielloc'h ket,
Rak pa vo Jezuz tremenet
Ha distroet warzu e Dad,
C'houi vo karget da labourat.

II

Dilezet bag ha rouejou,
Ho tud, ar bed hag e vədou,
Ez it en hent da heul Jezuz
Da gas ar c'helou dudius.

VI

Kit da embann lezen Doue
Er Samari hag er Judee;
Prezegit ha pedit bemdez
'Vit astenn e rouantelez.

III

« Doue fell d'ezan, me' zento » :
Ar c'homzou-se bête 'r maro
A vezò reolen ho puhez
Hag eienen ho santelez.

VII

Kerzit betek ar Spagn ouspenn,
Dre vor, da gas ar sklerijenn :
Ho labour, gand ar Spagnoled,
Morse ne vezò ankounac'haet.

IV

War an Aviel, ho kweler
Gand hor preur yaouank ha sant Per,
War menez Thabor o reposz
O tanva gloar ar baradoz.

VIII

Da Jerusalem deut en dro,
C'houi vezò Pastor bras ar vro
Ha dizale ho tiskibien
A vezò skouer ar gristenien.

IX

Siouaz ! Herodez Agrippa,
Renour ar vro, a fell d'ezan
Miret ne vije prezeget
Kenteliou sakr Salver ar Bed.

X

An digalon ! Kemenn a ra
D'e zoudardet o tibenna ;
Setu d'ar vuhez eternel
Aet ar c'henta 'z an Ebrestel.

XI

O Patron mat, eus barr an nenv,
C'houi gendal'ho labour Doue,
Rak diwar gwad ar verzerien
Bepred e savas kristenien.

XII

D'ar Spagn eo deut ho relegou ;
Ha pardounerien a verniou
A red eus ar pevar avel
Betek sant Jakez Kompostel.

XIII

Ar stered e Bali an nenv,
Daoust m'int niveruz koulzgoude,
N'int ket stankoc'h eget na vez
An dud war hentchou sant Jakez.

XIV

E Sant Jakez Lezerazian,
Ar gristenien war dro Guiklan
A garas ive a bell 'zo
Kana meuleudi d'hoc'h ano.

XV

Teurvezit rei, o Sant Patron,
Eun elsen eus ho nerz-kalon
D'an neb a deu betek ho ti
Dirak ho skeuden da bedi.

XVI

Eun elsen eus ho karantez
Da zervicha Doue bemdez,
Kousto pe gousto, war ho skouer,
Ha pa ve red beza merzer.

XVII

Berr eo ar vuhéz, ha ni a oar
'Maomp ket da jom war an douar.
Grit d'eomp, gant skoazel ho peden
Ar c'hras da gaout hor c'hurunen.

A. C.

*Aotre da voula,
Quimper, an 8 a viz Kerzu 1949.
J. CADIOU,
vikel-vras.*



IMP. MODERNE - LANDIVISIAU